

D'an 8 a viz C'hwevrer

- E 249, en Aleksandria, merzherenti **santez Quinta**. Da vare bloavezh diwezhañ an impalaer Philippus, dre ma nac'has azeuliñ an idolennoù, e voe ereet dre he zreid ha stlejet dre ar straedoù war ar pavezioù betek he marv.
- E 397, distro da Zoue ene **sant Evenz pe Juvenz**, eskob Pavia e Lombardia a stourmas gant nerzh enep disivoud Arius.
- E 613, **sant Nicetus pe Nizier**, eskob *Besoncio* (Besançon) e Burgondia. Mont a reas da vennigañ abati Sant-Pêr ha Sant-Paol Luxovium bet diazezet gant sant Koulman, hag e roas bod dezhañ pa voe argaset gant ar rouanez Brunehilde.
- E war-dro 889, **sant Kuzhman**, penitiour e Sussex. Goude marv e dad e vevas gant e vamm er baourentez hag er bedenn. Emañ e relegoù e *Fescan* (Fécamp) e Normandia.
- E 1239, **gwenvidigez Jacomina Settesoli**, intañvez a roe bod da sant Frañsez e Roma.
- E 1537, e-kichen Bergamo e Lombardia, **sant Jerom Emilian**, beleg, diazeour, Patrom an emzivaded hag ar vugale dilezet. Teneraet e galon gant dienez an emzivaded, ar merc'hed kollet hag ar vugale dilezet, e tiazezas urzh ar Gloer Reoliek hag int lesanvet *Somasked* eus anv kêr Somaska a welas penn-kentañ an oberenn. Mervel a reas diwar ar vosenn tapet oc'h ober war-dro ar glañvidi.
- E 1947, **santez Jozefina Bakhita**, gwerc'hez. Ganet er Soudan e rannvro an Darfour e voe skrapet ha gwerzhet evel sklavez. Ur wezh dieubet ez eas da leanez e Venezia ha da c'houde e Schio lec'h ma skedas he c'haritez.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Jagu pe Yagu**, abad, breur henañ sant Gwennole, stummet e skol sant Budog war enezenn Lavred a-gevret gant e gevell sant Gwezheneg. Gantañ e tiazezas abati Landouar (eskopti Sant-Maloù ; bremañ Sant-Jagu-an-Enez) ma voe an abad kentañ anezhi.
- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Drien pe Drin**, abad.
- En Devon e Bro-Saoz, **sant Kev**, merzher e Keresk.
- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Fieg**, manac'h, keneil sant Komgall Bangor.
- En Iwerzhon, **sant Koulman**, abad Clúain Ioráird.

D'an 9 a viz C'hwevrer

- War-dro 249, merzherenti **santez Appollina**. Danevellañ a reas sant Denez Aleksandria penaos e voe tapet krog enni gant paganed dirollet. Terriñ a rejont he dent hag e kinnigjont he leuskel ez vev war un tantad anez dezhi nac'hañ he feiz. Hi avat, dêvet ma oa he c'halon gant tan ar garantez en em daolas he-unan-penn e flammoù an tantad. Pedet e vez evit ar boan dent.
- E 410, distro da Zoue ene **sant Maron**, manac'h el Liban. Savet en doa e beniti e-kichen un templ pagan e rannbarzh Homs en hanternoz al Liban. War e vez deuet da vezañ ul lec'h pirc'hirinañ darempredet meurbet, e voe savet ur manati a zeuas buan da vezañ kêrbenn kristenion Siria a voe anvet *maroniz*, anv a virint pa voe aloubet ar vro gant ar vuzulmiz ha pa'z ejont da repuiñ e menezioù al Liban.

- E 695, e Bro-Hannonia, **sant Ansbert pe Austrebert**, beneadad, eskob ha feizvonnour. Da gentañ kañseller Neustria (Bro-C'hall) e tilezas lez Klotar III evit mont da-heul ar C'Hrist dindan renerezh sant Wandrilh abad Fontenelle ma voe e warlerc'hier. Diuzet da eskob *Rotomagos* (Rouen) e voe harluet gant Pepin Heristal, maer ar Palez, hag e varvas en abati Hautmont.

- Er VIII^{vet} kantved, merzherenti **sant Pêr Damas**. Stourm a reas a-enep disivoud ar Vanikeed hag e kareze an Islam a-ouez d'an holl. Harzet war urzh ar c'halif Walid e voe troc'het dezhañ e deod hag harluet d'an Arabia. Eno e kendalc'has d'embann ar feiz wirion dre e skridoù ha dre e vuhez santel.

- E 1824, e Westfalia, **ar wenvidigez Anna Katharina Emmerick**, gwerc'hez, leanez eus sant Eosten, kevrinourez espar. Ganet nepell diouzh Münster en un tiegezh kouerion, ez eas da leanez e kouent Eostenezed Dülmen. Pa voe divodet an urzh e 1811, e teuas de vezañ matezh ur beleg hogen e kouezhas klañv hag e rankas chom en he zi, dalc'het peurliesañ en he gwele hag o chom war yun. E-pad daouzek bloaz e tiwaskas bep Gwener poanioù ar Basion hag e resevas ar c'hleizhennoù. Grataet e voe dezhi diskuliadurioù a-zivout istor ar grouidigezh, an Istor santel, buhez hor Salver hag all a voe treuzskrivet gant ar barzh Clemens Brentano. Kalz a dud a zeue d'he c'haout o klask bezañ aliet pe frealzet.

- E Kembre, war-dro ar bloaz 560, distro da Zoue ene **sant Teliav pe Telo**, abad-eskob. Ganet eo Teliav e Kembre e Penally. Diskibl sant Devrig, e voe keneil sant Devi ha gentañ ez eas da Jeruzalem. Diazezañ ar reas abati Llandeilo Fawr hag e voe eskob-abad Llandaf. E 547 e teuas da Vreizh gant e venec'h en abeg d'ar vosenn velen a skoas ar vro. Skoazellañ a reas sant Samzun e Dol. Distro da Gembre e varvas Llandeilo Fawr. Diskouezet e vez a-chaoliad war ur c'harv, arouez an dasorc'h.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **sant Kadien**, abad Llanilldud, ha **sant Kednig**, abad, **sant Engan**, penitiour e Llanengan.

- En Iwerzhon, e 578, **santez Kareg**, maouez santel.

- Er VIII^{vet} kantved, **sant Alton pe Alto**, manac'h iwerzhonat, abostolour Bavaria. Da gentañ penitiour e-kichen Augsburg e voe fiziet ennañ hag en e geneiled gentañ gant Pepinus Brevus ur goadeg a zifraostjont evit sevel "*un ti*, emezañ, *dellezek evit servijout Doue*" a zeuas da vezañ un abati a vir e anv betek hiziv-an-deiz: Altonmünster.

D'an 10 a viz C'hwevrer

- E 202, da vare Septimus Severius, e Magnesia e-kichen Efezos, merzherenti **sant Charalampus**, beleg. 107 bloaz e oa ha beleg abaoe pell amzer pa voe diskuliet e gaou evel dispac'her noazhus hag harzet. Merzheriet e voe war un dro gant **sant Porphyre, sant Dauctus ha teir maouez santel**.

- E 304, e Roma, da vare Diocletianus, merzherenti **ar sent Zotig, Irene, Yasent hag Amañs**, a voe sebeliet war ar Via Lavicana.

- War-dro 547, e Monte-Casino, ganedigezh en neñvoù **santez Skolastika**, gwerc'hez, manac'hez, c'hoar sant Benead. Gouestlet da Zoue adalek he oad tenerañ e oa a ungalon gant he breur ha bep bloaz en em gavent o-daou evit tremen un devezh-pad ur bedenn hag en divizoù santel. Sebeliet e voe gant he breur er bez en doa prientet evitañ e-unan en abati.

- E 704, **santez Aostreberzh pe Aostoberta**, gwerc'hez, abadez Pavilly, manati bet savet gant sant Filberzh nepell diouzh *Gemetice* (Jumièges) hag a heulie reolenn sant Koulman.

- E 1175, **sant Gwilherm Malavalle**, beleg diazezour manati Wilhermidi e kontelezh Hannonia (Gl. Hainaut) en Impalaeriezh Santel Roman German. Ganet er Brabant, ne ouezas ket en em vataat eus an desaverezh a-zoare roet gant e dud. Desket gantañ ar vicher a varaer e renas ur vuhez amjestr hag ez eas da gantreal betek bezañ gounezet da Zoue. Mont a reas da benitiour hag e sachas diskibled davetañ. Neuze e savas ur manati e-kichen *Valentianae (Valenciennes)*.
- E 1255, merzherenti **ar gwenvidig Arnaldo Cataneo**, abad Santa-Giustina e Padova, merzher. D'ar mare ma rene an tirant Ezzelino er vro, e voe karc'harriet gantañ hag e tiwaskas boureviadur e-pad eizh bloaz betek mervel diwar e boanioù hag en digenvez.
- E Breizh-Veur, en II^{eil} kantved, merzherenti **ar sent Fagan ha Duvian**, beleion. Kaset e vijent bet gant ar pab sant Eleuter da gelenn ar roue breizhat Lucius, pe Lewer Meur. Kehelet eo bet sant Fagan evel warlerc'hier Jozef Arimatea ha sant Duvian evel proto-merzher Kembre.
- E 740, en hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos diwezhatoc'h), **sant Trumin**, eskob abad Abercom. Goude ma savas ar roue norzumbriat Egfrid enep dezhañ, e rankas kuitaat e vanati gant e holl venec'h hag en em dennas en abati Withby a oa dindan senterezh santez Elfleda.
- E 1772, e Roazhon, tremenvan **an Tad Gabriel Morel de la Motte**, chaloni eus iliz-veur Roazhon, d'an oad a daou vloaz ha tregont. Gouestlañ a reas e holl amzer d'ar bedenn, d'ar renadurezh speredel, da brezeg Komz Doue, da skoazellañ ar beorion.

D'an 11 a viz C'hwevrer

- **Kounlidadur merzherion niverus Numidia**, lazhet e 304 da vare heskinadeg Diocletianus. Dre ma nac'hjont reiñ ar Skriturioù Santel diwar dezvenegzh an impalaer e voent jahinet kriz ha lakaet d'ar marv.
- War-dro 407, merzherenti **sant Dider**, eskob Lingonas e Galia (Langres), lazhet gant ar Vandaled.
- E 731, e Roma, distro da Zoue ene **sant Gregor II**, pab. Kas a reas sant Bonifas da avielañ Germania. Derc'hel a reas darempredoù start gant ar Sav-Heol hag e stourmas a-enep an dispennerion-ikonennoù gant sant Jermen Kêrgustentin.
- E 824, e Roma, **sant Paskal I^{añ}**, pab. Lakaat a reas da dreuzlec'hiañ relegoù sent ar c'hatakomboù da ilizoù ar gêr. Bez' e oa abad manati Sant-Stefan, nepell diouzh ar Vatikan, pa voe diuzet e 817.
- E 867, **santez Teodora**, impalaerez bizantat. Lakaat a reas un termen da zisivoud an dispennerion-ikonennoù a vez kounaet gant Gouel ar Reizhkredenn en Ilizoù ar Reter. Echuiñ a reas he buhez en ur manati tra m'a oa bet tennet kuit he galloud diganti gant he mab Mikael III.
- **Gouel Itron-Varia Lourda**. Emziskouezioù etre an 11 a viz C'hwevrer hag ar 16 a viz Gouere 1858. Pevar bloaz goude embannidigezh dogma ar Werc'hez Vari Engehentet Dinamm, en em ziskouezas ar Werc'hez Vari dindan an anvadur-mañ da vBernadetta Soubirous e bro-vBigourdan er Pireneoù hag e c'houlennas e vefe pedet ha graet pinijenn.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **santez Gognata**, abadez, diskiblez da sant Abban, kehelet pergen en inizi Aran hag e kontelezh Kerry.

D'an 12 a viz C'hwevrer

- E 304, en Tunizia, da vare heskinadeg Diocletianus, **Merzherion Santel Abitena**, hag int 49 c'hristen harzet bodet p'edont o lidañ ar C'hevrinioù Santel. Kaset da gKartaga e voent jahinet ha lakaet holl d'ar marv en abeg d'o feiz. En o zouez **sant Saturnin**, beleg, hag e bevar bugel: **Saturnin ha Felix**, lennerion o-daou, **Mari**, gwerc'hez goueslet hag ar bugel **Hilarion**.

- E 304, merzherenti **santez Eula Barselonna**, gwerc'hez. Ne oa nemet daouzek vloaz pa voe taolet d'ar geuneudeg dre m'he doa kredet rebechiñ e grizder ouzh ar gouarnour a heskine ar gristenion.

- E 740, e Breizh-Veur, **sant Ethelwold**, eskob. Keneil sant Cutberth, e voe priol manati Melrose e Bro-Skos a-raok bezañ anvet eskob Lindisfarn war aod Norzumbria.

- E 821, en Inden nepell diouzh Aachen en Impalaeriezh ar C'hornôg, distro da Zoue ene **sant Benead Anian**, abad. Dispakañ a reas ar vanac'helezh e Bro-Akwitania hag e skignas reolenn sant Benead dre Gornôgeuropa a-bezh gant harp an impalaer gall Loeiz I^{añ} *an Deol*.

- War-dro 1136, **ar wenvidigez Humbelina**, abadez, c'hoar sant Bernez. Tra m'o doa en em ouestlet en abati Citeaux he zad hag he c'hwec'h breur, e timezas-hi gant breur dugez Lorren hag e renas ur vuhez mondan ha diroll. Diwar ambrougadenn he breur sant Bernez avat e kemmas buhez hag e tivizas, gant asant he gwaz, mont da leanez e manati Jully, en eskobiezh Troyes, a zeuas buan da vezañ re vihan evit degemer ar galvidigezhioù nevez. Neuze e savas manati Crisenon.

- Er VI^{vet} kantved, **sant Rieg**, manac'h en abati sant Yagu e Landouar (Sant-Yagu-an-Enez) e Bro-Boudouvr. War ali un ael en em ziskouezhas dezhañ e-pad e hun ez eas d'en em staliañ en tu-all d'an Argenon, en eskobiezh Sant-Brieg eta, war un uhelenn a-us d'ar pleg mor e Sant-Kast-ar-Gwildoù.

- En XI^{vet} kantved, **sant Riog**, manac'h gant sant Felis, a vevas gant sant Goustan war enez Houedig, a zo beziet e-kichen sant Felis en abati Rewiz.

- **Sant Gwened**, penitiour e Brieg e Kernev.

- En Iwerzhon, e 874, **sant Fachtna**, eskob Ard Mhacha.

- E 1202 e Nordhouse e Bro-Elzas, **sant Ludan** (Luden; Gl. Loudain), pirc'hirin skosat. Goude marv e dad, an dug Hildebod, e ouestlas e holl vadoù d'an oberoù a garitez. Aet da bic'hirinañ da Jeruzalem e varvas e Bro-Elzas war hent an distro.

D'an 13 a viz C'hwevrer

- War-dro 250, e Meliten en Armenia, merzherenti **sant Polieukt**. Kanttroet dre e vignon Neark a oa milour eveltañ ha kristen gredus, e nac'has, kerkent ha badezet, kinnig aberzhioù d'an idoloù a gredas terriñ zoken. Neuze e rankas gouzañv meur a voureviadur hag en diwezh, divrall dirak daeroù e dud, e voe dibennet.
- War-dro 700, distro da Zoue ene **santez Ermenilda**, abadez e Bro-Saoz. Merc'h Eorcenberht roue Kent ha santez Sexburga, e timezas gant Wulphere roue Mersia. Ur wezh intañvezet ez eas da vanac'hez en abati Minster bet diazezet gant he mamm war enezenn Sheppey. Abadez ur pennadig eno ez eas d'he heul en abati Enly lec'h ma voe abadez ivez war he lerc'h. He merc'h santez Werburga a voe ivez abadez Enly war he lerc'h.
- E 1237, tremenvan **ar gwenvidig Jourden a Saks**, eil mestr meur an Dominigaded. Goude tremenvan sant Dominig e voe diuzet e penn an urzh a c'houarnas e-doug pemzek vloaz gant furnezhh hag avizded.
- E 1306, **sant Fulkran**, eskob kêr Lodeva en Okitania. Heverk e voe a-fet karantez evit ar beorion ha gredus evit al lid doueel.
- E 379, **sant Dominus (Domnin)**, eskob kentañ Dinia er Provañs. Deuet gant sant Marsellin ha sant Visant eus hanternoz Afrika e voent kaset da giminiadiñ gant ar pab sant Melkiad. Goue ma voe eskobet Marsellin gant sant Euzeb Vercilli ez eas Dominus ha Visant da avielañ rannvro Dinia. Marsellin a zeuas da eskobañ Dominus ha Visant a voe eskob ivez war e lerc'h.
- E Breizh, er ^{V^{vet}} kantved, **sant Riog pe Rieg** (pe Riou, Lt. Riocus), manac'h ha beleg. Mab an tiern pagan Elorn eus ar Roc'h-Morvan, gounezet d'ar feiz gant sant Derien ha sant Neventer, e echuas e vuhez e Landevenneg da vare sant Gwennole.
- En Iwerzhon, er ^{VI^{vet}} kantved, **sant Mezevneg** (Iw. Modhomhnach), Iwerzhonad, diskibl sant Devi e Kembre, penitiour e Cill Cainnigh.

D'ar 14 a viz C'hwevrer

- War-dro 269, e Roma, merzherenti **sant Valentin**. Tra ma felle d'an impalaer Claudius berzañ an dimeziñ a-benn kas muioc'h a wazed d'ar brezel, e kendalc'has ar beleg yaouank Valentin da zimeziñ ar gristenion. Harzet war urzh ar prefed Placidius, e voe skourjezet ha dibennet war ar Via Flaminia.
- Er ^{IV^{re}} kantved, distro da Zoue ene **sant Auxensius pe Aokseñz**, beleg, penitiour war menez Skopa e Bitinia. Ganet e Siria en un tiegezh persat, e voe milour e gward an impalaer Teodoz ar Yaouer, a-raok bezañ gounezet d'ar feiz ha mont da benitiour e menezioù Anatolia. Dre e brezennoù hag e vurzhudoù ez embannas ar reizhkredenn.
- Gouel **sant Kurilloz**, manac'h, ha **sant Metodioz**, eskob, kenbatroned Europa abaoe 1980. Genidik a Vro-C'hres, e voe kaset an daou vreur gant Photius, Uheldad Kêrgustentin, da avielañ ar Slaved e Moravia. Diorren a rejont ul liderezh e slavoneg hag e tiaezeztont ul lizherenneg a vez graet *kurillek* hag a voe kavet mat gant ar pab Hadrian II. Aet o-daou da Roma e varvas Kurilloz d'ar 14 a viz C'hwevrer 869. Metodioz a voe urzhiet eskob Sirmium gant ar pab Hadrian hag e avielas Pannonia e-kreiz e-leizh a ziaesterioù betek e varv d'ar 6 a viz Ebrel 885.

- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Derien pe Derian** (Lt. Derianus), abad, breur sant Neventer. Lidet e vezont o daou a-gevret d'ar 7 a viz Mae.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, distro da Zoue ene **sant Biavili**, manac'h, diskibl sant Gwennole a yeas da benitiour gant sant Varzhin e-kichen ar Faou e Kernev.
- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Manac'han**, abad.
- **Sant Kuñvan** (Iw. Caomhan), Iwerzhonad, manac'h, aet da brezeg an Aviel da inizi Erc'h.
- En XI^{vet} kantved, **ar gwenvidig Andrev** (pe **Andras**), manac'h-beleg en abati Fontevraod e Bro-C'hall, kofezour sant Roperzh Ervrezhell.

